



AR C'HLÉUZ ALAOURET

HAC

AN TOUR DANTELEZET



Var eun ton Galec.

Er Finistèr e zoun bet ganet,
E He Castel-Paol eo man va brô ;
Ar vrô güella a ouffet cavet,
Ha caera Tour zo tro vardro.
Me o c'harie, me o admire,
Qenlies deiz ro Doue, me lavare :
Me gar va C'hleuz alaouret,
Va Zour dantelezet.

Mes, pa voe rentet din ar c'hêlou
E zoa ret qüittat va mestrez ;
Ha mont da heuill an tabourinou ;
Dilezel tad ha tieguez,
Me meus changet ha lavaret :
Oh ! n'antân qet, n'antân qet, n'antân qet... .
Güell eo va C'hleuz alaouret,
Va Zour dantelezet.

Hac e vijen-me en em fac'et ?
Senti d'an urz me a rānge.
Tud mechant a rē scouārn calet
Oc'h va daéiou, va c'hlémou-me,
Hac e c'hoarzet, e voa paet,
O lavaret : Yvonic ? n'antàn qet !
Adieu va C'bleuz alaouret,
Va Zour dantelezet.

En déspet din-me, er rejimant,
En exerciç, Yvonic paour !
N'em boa na gout nac ententament
D'anaout james droite, demi-tour ;
Hac e trôen evel ma sonjen,
Dre ma trôen, gant angen e clasqen
Güelet va C'bleuz alaouret,
Va Zour dantelezet.

Diouc'h ar gamel tam né brofiten,
Treud, qen a güezen eus va za,
O vont varlerc'h ar c'horf me chomme
Bep cant bas d'en em discuiza
Hac e voelen, dre ma sonjen
Marteze qen birviqen ne veljen,
Siouas ! va c'bleuz alaouret,
Va Zour dantelezet !

« D'ar paotr-má n'eus nèmet eur remed,
(Emen doctör) : eur c'honje mad ;
« Güelit-en... entrezec ar véréd
« E qerz ar c'heas paour timad.
« Ha great e voe var ar guer-ze
« Dal da gonje gea d'ar guer alesse
« Da gaout da Gleuz alaouret,
« Da Dour dantelezet. »

O va hrô gueaz ! O hrô beniguet !
Cetu me distro en ho creiz !!!...

Ra vezô da vigen miliguet
Ar re am c'hasfe deus va Breiz !
O va Zad paour ! O va Mam guez !
O Jantonic, va anter-tiequez !
Gloar d'hor C'hleuziou alaouret !
D'ho Tour dantelezet !

Bremàn cetu me em zieguez,
Gant Jantonic, va greguic coant ;
Eur greguic douç, leun a vadelez :
A ra pep tra hervez he c'hoant.
Beza hor bo bugaligou
A vezô coantic evel celigou.
O va C'hleuziou alaouret !
O Tour dantelezet !

Hac'en zo bôneur pár d'am hini ?
Nan m'en assur, a dra certen :
Ne meus mui aoun deus an onnemi,
Ha n'em bezo tanfoultr biжен,
N'eus general, na corporal
A ell güelet eveldòn-me ractal
Qer caér C'hleuziou alaouret,
Na Tour dantelezet.

C'houi, soudardet va regimant,
Qersit oll d'ar victor atao ;
Pepini en deus e zantimant ;
M'en em gar gant Jantonic brao.
C'houi a redo pell dre bep brô,
Ha me chommo amân bete 'rmaro,
Gant va C'leuziou alaouret,
Va Zour dantelezet.

Mes mar teufe biжен ar Zadzon
Da attaqui va brô qer Breiz,
Eleal neuze, en güir Breton,
Me en tou amân var va feiz,

Qerqent e ven güir tor e ben,
Gant va Jantonie, hon daou o tisen.
Hor C'hleuziou ker alaouret,
Hon Tour dantelezet.

Eun deiz, pa éruo an termen
Ma vezò ret renta ar gont,
Dirac treid ar Barner Souveren,
Me gred n'em bezo qet a spont :
Me meus bepret an oll caret,
Ha va Jantonie ha me admireret
Hor C'hleuziou caér alaouret,
Hon Tour dantelezet.

FIN.

